

AR PORTRET VERITABL

DEUS A

VIZERRIO AR LOENET EN MESQ AR BOET BIAN

Ebars ar blavez presant, couls 'vel cr blavez da dont

Laquet en rimm gant IANN AR MINOUS, a barous Plumeur-Gautier

BILAJEN ZANT-ADRIEN

VOAR EUN TON DOUS.

Ma ve ann den a zonjfe enn he oll vizerrio
Nep joaüsdet er bed-man, ive nep dezirrio
Pelloc'h hen na guernerfe da vean evurus :
Allas ! buguelic Adam, te zo eur malherus.

Ma na vije nemedout, ive da vianan,
Na zantchenn quet ma c'halon quemement o languissan,
Nep a zo dide zujet, ar pez a gavan cri,
A renq c'hoaszouffr, evel-d'hout, goalenguer a gasti.

Zell ar paour quez danvades, casset guenit d'ar lann,
Netra mui na gav eno nemert bruk ha trouskann,
Caër he deus bemde blaëjal, den mui na zell outhi :
Deja, o clasq n'm vaguan, he deus uzet he fri.

En toul ar pors, p'henu arrio, c'houi he goelo prestic
O prestan he ziscourarn d'ar gomz dous baraic,
Hac o tonet da c'hoessa, en dornic he maëstres,
Eun tammic breun p'he vara, p'he eun tamin patates.

Lezomp ar paour quez Moutic, demp da Bouchic ive :
'Vit bean hir he c'hergnio, divoar leign ar mene,
A fell dei n em revolutin a enep d'he C'hrouer
Pini dezi na brodu, zivoas ! nemert mizer.

Ia, ma vije eur c'risten, ma breudeur, a zonjfe
Enn mizerrio ar bouchic hac enn he faourante,
Na zerje mui he galon ouz moez ar loenic-paour
Pehini a dal dimp-ni arc'hant hac ive aour.

Clanv ez eo ar maëserric a zefout n'he all cad
Eun tammic boët d'he vouchic n'hac ive d'he danvad ;
'Vel en guiz d'ar Vadelen, bemde a scuil daëro,
O tonet da gontemplin enn he loënediguo.

Lezomp ar paour quez Bouchic breman 'ta la goste
Ha demp d'ar paour quez Coantic, eur momedic ive,
Goall drist ez eo he migno, zivoas ! defaut a voet,
N'eurblaneden argoassan, Coantic paour, ez out coeet.

N'hen deuz dezi nep moyen pelloc'h da vean lard,
Rac ar peurin evithi, en pep-couls, a zo stard ;
Razet ez eo ar parc' 'vel gant ar razouer,
Pe 'vel pa ve tremenet dreize oll ar falc'her.

Deus ar parc, pa zortio, n'em gavo primm hep dour
D'ar puns a renq monet 'vit gallout n'em zicour,
Hac ar paotr-zaout, mateze, scouls-caëro c'halompad
A deuio primm d'he c'hraouian zivoas' gant ar zec'hado

Ouz he stag, pa vo arri, gant ar bres d'en em glasq,
Muan m'allo a sachjo voar gordennic he nasq
Ouz n'em c'houl, quer truezus, eun tammic boët

[mar plij

Ar zonj deus ar loen paour-man en pep-couls em affij

Petra vo t.olet dezi eno neuze d'he flas ?
Eun dornad plouz marteze hac a vo du he fas,
Ha gant hennes a renq ober he fansion,
Evit foen u'he devo qu't, quen neubeut a velcho

Lezomp ar paour quez Coantic ha demp d'ar paour
[quez marc

Pehini, zivoas ! ive goell losq n'he zav n'em dalc'h ;
Cazi eo crog da goean divoar e beder c'har,
Ha c'hoas beguen ar scourje out'han zo goal digar

Hep nep tam kerc'h ea goelan enu hanter ann amzer
Da greguin voar ar bara n'en deus c'hoas nep pouer
Ar foen dean zo faillet, couls memez 'vel ar plouz
Labour he teus 'ta, Moji, d'ober bemdez fas-rouz

Labour he teus da voelan, te ive, marc'hadour,
Te pini a bæz, bemde, bars en huellan cour,
Ar boët pini a zebres ; mes ze n'eo quet avoalc'h :
Queroc h did cals a gousto pansionin da varc'h

P'he 'zi gant da c'hoec'huguenec, p'he guentoc'h
[gant da seiz

Da glasq boët d'ez Campi te gavo ludca laiz
Pere a voerzo, dide, barz en huellan pris.
Eun tam boët ha na vo quet brassoc'h vit pen da vis

P'he zi c'hoaz da glasq lojan enn hostelerio,
N'out quet capabl da gompren peguement a gou
Did eno ann ordinal, bez eta gant da jeu,
Rac quer vo bevoan loënet ebars er bla a deü.

Camm da c'heno, mar queres, ha taston da c'hodel,
Mar queres en em lezi, gant glac'har, da vervel ;
Da varc'h a renqui goerzan, couls vel da chareban,
Mar gout'za eur miliner custom prim n'em zammam.

Labour he teus da voelan, te ive, paotr harnes,
Ha da gargan da galon a bep tristidiguez ;
O tonet da gontamplin enu eur quezegueyo
Pere goejal a c'hre-tes en guis pompinello.

Te bepret a blij dide guelet da guezec lard,
Pa zelles ouz boed-bian n'elles mui bean zard ;
Meur a damm zur a yuni evit rein d'ar vejer
Couls memes vel d'a Voji, aun dra ze a zo scler.

Meur a damm c'hoas a laeri, en ze neus quet a dout ;
C'hoas da vonet d'ar prison na vi pelloc'h en rout,
Eun tammik croz marteze reio did da vest,
Doue deus da garante bepret n'em gavo test.

Zell peguen treut eo arri ar gazez velen-ze,
Pebini 'ta, neus quet pel, vel ann aour a luc'he ;
Chanchet he deus a habit ha chanchet a groc'hen,
Cazi eo crog da c'hoerzin out hi ar guiguerien.

Mar guez gant-hi d'ar foario enn esper he guerzan,
Paotred ann arc'han-t-bian a glasgo he frenan,
Ha caer as po chipotal a vezi c'hoas riselet
Da return d'ar guer ganti hep na vezo guerset.

Quement-se oll a c'hoarve 'barz en amzer brezant,
Vel se ve biancet en hon zoez ann arc'hant,
Mes salocroas, n'en d'eo quet, paturach eo a vanq
Zivoas dimp, boet al loenet zo pel deus bean franq.

Labour e teus da voelan c'hoas, te, plac'h tiegues,
Ha da gargan da galon a bep tristidiguez,
Ho tonet da gontamplin enn eus Coantic ive
Ouz pebini 'ta quemend eo stag da garante.

O coantic paour, emezout, red a vo perissan,
Da vest a lavar bemde he vo red da lac'han ;
'Vit mout guenid d'ar foario, den na bren ac'hanoul,
Da vont 'ta gant ar c'higuer, Co-ntic paour, risquetout !
Mæs da c'hortos quement-se dat c'hoas enun tammic

[foen,
Biscoas na meus bet mesquet dousoe'h, gentiloc'h loen
Evit ne c'honde Coantic, petra da laret-se ?
Red eo dimp n'em guimiadin ann eil dious eguile.

A te, ma loue bian, zorti prim deus ta goe
Na mo quet deus ac'hanout enn nep faeson ar voel ;
Na red mui nemert crial en default da gad laez,
Capabl ez out da ziscar deus he zav da vamm-guez.

Labour he teus da voelan, te c'hoas, plac'h e c'hochie,
Ha col ha betrabes a vanquo did prestic ;
Opijet vi da lezel da bore'hel bian treut
Da tammic brenna doujes couls vel da dammic bleut.

Neusquet pell voa ar ranson cochic quez a voar-n'out,
Ouspenn deus an daou-hanter en traou disquennet-out,
Pouesu da chans pa gari, kers buan enn as tro,
Da vestres a lar dide : quen-a-vo. quen-a-vo.

True la compassion, ma breudeur, eo goelet
Dars en pes position enu em gav ar loenet
Surtout barsann hon amzer, en ker ha voar ar mæs,
Deja, gant un solution enu em gav faes.

Homan a zo eur resil composit a nevoe
Divoar benn ar goall-voalen a ro dimp-ni Doue,
'Vit donet d'hon hastian dre voyen hon loenet
Voar bere, ouспен mil goech, zivoas ! hon deus pec'het.

Ped goech obt ma breudeur, n'hon deus quet implet
Hon zaeodo da valozin, surtout voar hon loenet ?
Nin epquen a zo quirricc ma maing enn paourante,
Doue, 'vit hon c'hastian, a bermet quement-se,

Ped goech c'hoas, zivoas ! ive n'hon deus quet profitet
Diouthe da labourad d'an deio difennet :
Evel ma z'eo d'ar zullio, d'ar goelio-bras ive ?
Eun tammic eals re hardi a voamp oll ouz Doue.

Ped goer e hoas a gouleman, gant amzer a venjans,
N'hon deus quet dreize torret lezen ann abstinans,
O tonet da gontantin hon sensualite,
P'ro deo quig a blij dimp nin breman hon defo re.

Red ez eo d'ar voucherrien donet bemde abenn,
'Vit hon brassan domaj, ouspenn deus a vil loen ;
Deus a bep ras a voelan o vont d'ar guigueres
Couls memes vel d'ar sautier hanvet ar guigueres.

Evit mann e hoas a voelan, surtout bars ar foario,
Loenet bras, loenet diar, bep sort qualiteo,
Enn eunn tol goel chauchamant n'on quet penos
[vo cont :

Meus aon da glasq bara, fermier, a vo red mont.
Tor he benn ta p'he gari breman d'ar feurm quer ze,
P'he birviquen na alli bevoan da vugale
N'em vevoan da unan ha paçan da aotro,
Ze did zo impossibl, p'he eo faos ma c'homzo.

Ha te, paour quez devojer, zell entrezec ann env
Ha lavar, a greis calon gant eur zel a drue,
A vo bian da labour, te ive, artisan,
Lar quement-se heb ober mui a c'heno bian.

Ha te, perc'hen ann danve, groa ive da ganvo,
Ma n'as pe quet a arc'hant, caer as po cad plasso,
A vi ive eveldomp eur paour quez malurus :
Homman'eo quet ann amzer da vean evurus.

Enfin, aman, ma breudeur, 'vit gair a achuan
Ar recit-man quen touchant pebini a ganan :
Ous ho pedin ha galon, oll, d'en em gonsolin,
Netra mui na c'honfomp ouz n'em dizesperin.

Ann auteur deus ar recit pe deus ar ganouen
Pebini dec'h a citan, gant daero hag auquen,
A zo en peb bro hanvet, couls vel en peb parous,
Gant an ole, bras ha bian, Yann, Yann, Yann Ar Minous.

Ar lec'h deus he domissil, a-boe ma z'eo bian,
A zo en eur vilajen hanvet Zant-Adrian,
Situat en eur barous hanvet Pleumeur-Gautier,
En Lezardren eo gauet, en Kervouster ive.

Bezan en deuz da vevoan noubr braz a vugale,
Me grad eun hanter-donsen a gouter diout'he,
Pere oll a zo yaouanc, dibourve ha dimerz,
Bepret en heat ar furnes ar c'hoec'hic-ze a guerz.

Graç d'he da gontinnin oll dre ar memez hent,
Certen ma na reont quet me a scrigno ma dent,
Ma baz c'hoaz a guemerin, couls vel ma scubalen,
Caer en defo Françoisic essa ma diarben.

YANN AR MINOUS.

(Propriété de l'Editeur.)